

KANTIKOU
EVIT MIZ MARI

Gouel ar Plac'h euruz Jeann d'Ark
ha Sant Mikeal

GANT EUR MISSIONER BREIZAD



KEMPER
MOULLET E TI A. DE KERANGAL

1910

KANTIKOU EVIT MIZ MARI

1. Promessaou ha pedennoù d'ar Verc'hez.

Var don : *O nag hir eo an noz.* (Toniu Kemper, 39.)

Setu deut adarre miz Mae, miz ar bleuniou,
Ar miz he deuz choazet Rouanez an envou.

Aman, epad eur miz, e tiredimp bemnoz
Da veuli ar Verc'hez, da c'houlen he bennoz.

Bemnoz, a greiz kaloun, ni gano assemblez
Hor c'hantikou kaera en honor d'ar Verc'hez.

Bemnoz, dirag he zron, gant guir fizianz enghi,
Devot ni lavaro : « Me ho salud, Mari ».

Bemnoz vo mall ganeomp klevet he c'henteliou,
A zesko deomp guelloc'h kerzet var he roudou.

Ar boan a gemerimp ne vo ket poan gollet :
Varnomp nag a c'hrassou bemnoz a vo skuillet !

Mari, hor zikourit d'en em ziuall bepred
Dioc'h an diaoul milliget ha skoueriou fall ar bed.

Pa vo, gant ar glac'har, rannet hor c'halonou,
Ho pet ar vadelez da zec'ha hon daelou.

Benniget hor c'herent hag holl dud ar barrez ;
Grit ma reno bepred an urz vad 'n hon touez.

Plijet ganeoc'h ouzpenn pedi 'vit an Iliz,
Ma kavo en hor bro ha peoc'h ha guir frankiz.

Da heur va zremenvan, o n'am dilezit ket ;
Difennit ho pugel enep an drouk-spered.

Ra vo ganeoc'h d'ho Mab kinniget va ene,
Ma vo ganthan raktal digemeret en Ee.

J. B.

2. Ar bleuniou, mellezour ar Verc'hez.

Var don : *Kaloun dous a Vari.* (Ton n° 63.)

DISKAN :

Ave, ave, ave Maria (bis).

Digor eo Miz Mari !
Holl, a vouez huel,
Kanomp mil meuleudi
D'ar Verc'hez santel.

Ar glasvez, ar bleuniou
Breman, var ar mæz,
A zav hor sperejou
Varzu ar Verc'hez.

Liou tener ar glasvez,
Ken dous d'al lagad,
A embann santelez
Mari, hor Mamm vad.

Ar bleuniou ker koantik,
Bleuniou 'bep seurt liou,
A zo eur skeudennik
Euz he vertuziou.

Pa velomp al lili,
Gant ho liou guenn-kann,
E sonjomp e Mari,
Guerc'hez bepred glan.

Liou ha c'houez ar rozen
D'hor spered ivez
A ginnig eur skeuden
Euz he c'harantez.

Hag ar violetez,
Er yeot demguzet,
A verk deomp ar Verc'hez
Modest, humbl bepred.

Mari n'he deuz morse
Karet gloar ar bed ;
Daoust ma oa Mamm Doue,
N'he doa lorc'h ebet.

Ennomp holl, o Guerc'hez,
Gant ar burete,
Lakit guir garantez
Hag humilite.

Euruz neb a heuillo
Skouer ho vertuziou !
Da viken e vleunio
Ganeoc'h en envou.

J. B.

3. Meuleudi ha peden d'ar Verc'hez.

Var don : *Eun Doue a zeu d'ho kervel.* (Ton n° 16.)
pe: Ar voyez 9'en em assuri.

DISKAN :

*Diredet omp holl, o Mari,
Dirag ho skeuden zantel ;
Diredet omp holl d'ho meuli
Ha da c'houlen ho skoazel.*

Mari, tenzor an holl grassou
Zo 'n ho taouarn beniget,
Ha dreizoc'h var an enëou
Bemdez e vezont skuillet.

Mari, guir fizianz ar pec'her,
Nerz ha yec'hed ar c'hlanvour,
C'houizo'vidomp eur Vamm dener,
Prest oc'h ato d'hor zikour.

D'hon enëou an drouk-spered
'Ra eur brezel heb ehan ;
Enep dezhan, o Mamm garet,
Hon diouallit hoc'h unan.

Pa zeu deomp eur c'hlenved poan-
Pazomp nec'het, glac'haret, [iuz,
Astennit ho tourn gallouduz
Hag e vezimp diboaniet.

Da viana, deomp goulennit
Ar basianted kristen,
Ma vezo brassoc'h hor mirit
Ha kaeroc'h hor c'hurunen.

Pedit ma zeui startoc'h bemdez
Hon esperanz hag hor feiz,
Ha ma zeui tan ar garantez
Da greski bemdez 'n hor c'hreiz.

Grit ma talc'himp, e Breiz-Izel,
Da veza guir gristenien,
Ma lavarimp : « Kentoc'h mervel
Eget beza treitourien ! »

Deut d'hor zikour, Guerc'hez Vari,
'Kreiz an diveza stourmad ;
Ganeoc'h ni vo sur da drec'hi,
Sur da gaout eur maro mad.

J. B.

4. Kantik all evit Miz Mari.

Var don : *E Sakramant e binijen. (Ton n° 15.)*
~~pe : An Rouez Doue an astennit.~~
DISKAN :

*Kanomp. kanomp gant levenez,
Rag deut eo Miz kaer ar Verc'hez ;
Savomp, savomp hor c'halonou ; bis.
Varzu Rouanez an envou.*

Ra zeui an Ee hag an douar
Da gana meuleudi ha gloar
D'an hini zo e guirionez
Hor mamm hag hon advokadez.

Bemdez e harz he aoteriou,
Guisket brao gant fleur ha bleu-
Ha dirag he skeuden zantel, [niou,
Pedomp^o Mamm ar Verb eternal.

Araok beza netra krouet,
Doue hen devoa he choazet,
Evit beza Mamm d'he c'hrouer,
Mamm d'an Den-Doue hor Zalver.

Gant guirionez e lavare :
« Va ene rent gloar da Zoue » ;
Rag ennhi Doue a ziskouez
He c'halloud hag he vadelez.

« An holl-galloudeg hen deus græt,
Emezhi, traou braz em andret ;
Taolet hen deuz gant karantez
Eur zell var he zervicherez. »

Pec'hed hon tad kenta Adam
A zo eur bilim, eur c'hontam :
An holl ganthan zo bet tizet
Nemet ar Verc'hez beniget.

Nan, bilim ar pec'hed biskoaz
En he c'halon ne antreas ;
Ennhi evel en eur palez
Eo diskennet ar zantelez.

Nan, biskoaz Satan n'hen deus bet
En ene Mari guir ebet
Dre ar pec'hed orijinel
Na dre ar pec'hed aktuel.

Mari en Ee a zo savet
Dreist an holl zent hag an aëlet,
'Kichen an Tad celestiel,
He Mab, hag ar Spered santel.

(Feiz ha Breiz, 27 Ebrél 1867.)

'Vel Jozeph, e ti Pharaon,
Mari azezet var eun trôn,
A ren, assamblez gant Doue,
Var an douar evel en Ee.

Divar he groaz, prest da vervel
Jezuz varnhi 'rëas eur zell,
Ha deomp holl bugale Adam
E roas he Vamm evit mamm.

He daouarn zo leun a c'hrasou,
Evit skuill var hon enëou ;
Goulennomp eta kalonek
Grasou nerzuz ha galloudek.

F. B.

5. Kantik ar « Memorare ».

(Peden Sant Bernard d'ar Verc'hez.)

Var don : *Santez Mari.* (Ton 53.)

Guerc'hez leun a drugarez, ho pezit sonj bepred
N'euz bet klevet lavaret biskoaz gant den ebet
E ve ganeoc'h digouezet aviziou dilezel
Neb a zeue davedoc'h da c'houlen ho skoazel.

Deut oun ive gant fizianz, Guerc'hez ar guerc'hezed ;
Dirazoc'h, gant hirvoudou, pec'her paour oun stouet ;
Arabad, o Mamm Jezuz, disprijout va c'homzou ;
Selaouit gant madelez ; grit d'in va goulennou. (1)

J. B.

6. Kantik evit kloza Miz Mari.

Var don : *Kantik ar baradoz.*

Kenavo d'id, miz Mae,
Miz Mari miz ker gae,
Kenavo d'id da vloaz,
Mar venn beo neuze c'hoaz. } bis

Gant ar brassa dudi
Me wel da zigeri ;
Gant ar boan ar vrasa
E welan da zerra.

(1) 300 dervez Indulj. bevech ; Indulj. plenier bep miz, d'an deiz
ma karer, var bouez derc'hel bemdez da lavaret ar beden, pe da
gana ar c'hantik-ma. (Kondisionou ordinal : kovez, kommunia, etc.)

Kenavo eur vech c'hoaz,
Mis kaera euz ar bloaz,
Miz laouen, miz seder,
Miz Mari, va Mamm ger !

Ke ; mes deuz prim en dro,
Ha setu me glevo,
Me glevo c'hoaz bemdez
Meuli va Rouanez ;

Meuli he zantelez,
He gened, he furnez,
He galloud, he brasder,
He c'halon ken tener.

Me glevo c'hoaz kana,
Ebarz en iliz-ma,
Kana a vouez huel
He c'hantikou santel.

Me velo adarre
Bemdez he bugale
O tiredeg ama
D'he henori gant joa.

Me velo he aoter
Kempennet gant preder,
Kaer meurbet adarre,
Kaeroc'h eget morse.

Ha dreist holl varnezhi
E velin gant dudi
He skeuden beniget
Gant bleuniou kurunet.

Mes siouaz ! marteze
Ne vevin mui neuze :
Doue hor c'hass gantha
Pa zonjomp neubeuta.

Mar venn eat, me ho ped
Kerent ha mignouned
Da ziuall d'am ankoat
En ho pedennou mad.

Ha c'houi, o Mamm dener,
Mar am galv va c'hrouer,
O grit, grit d'ho pugel
Kaout eur maro santel.

(*Feiz ha Breiz*, 1868.)

Y. K.

7. Peden araok kuitât an iliz.

Ton gallek : *Avant de quitter notre Maître.*

Araok kuitât Jezuz Hor Zalver,
En em daolomp en he Galon ;
Eno hebken, eno e kaver
Ar peoc'h, an eurusted guirion.
Araok kuitât, etc... (*Beteg : Eno hebken...*)

Deoc'h, ô Mari, Mamm a garantez,
Kenavo e laromp ive.
Pa zigouezo termen hor buez,
Hor c'hassit holl ganeoc'h d'an Ee.
Deoc'h, ô Mari, etc...

Ha c'houi, Pried santel ar Verc'hez,
Jozeph, bet truez ouz hor stad ;
Beillit varnomp a hed hor buez,
Ha grit deomp kaout eur maro mad.
Ha c'houi, Pried santel, etc. ..

Kannaded Doue, Elez santel,
Sellit ouzomp gant trugare ;
Astennit varnomp ho tiouaskel ;
Grit deomp kerzet varzu an Ee.
Kannaded Doue, etc...

Bezomp sonj mad euz hon tud varo,
Euz hor c'herent, hor mignoured ;
Pedomp ha greomp pinijen 'vitho,
Ma vint heb dale diboaniët.
Bezomp sonj mad, etc...

J. B.

EIL LODEN

KANTIKOU D'AR PLAC'H EURUZ JEANN D'ARK

Kantik kenta.

Var don Kelven pe Breuriez ar Feiz.

*Beteg ho trôn en envou, o Jeann, henor bro Franz,
E kassomp holl hor peden gant feiz ha gant fizianz ;
Enebourien an Iliz a zav huel ho fenn,
En ho enep deut buhan, deut buhan d'hon difenn.*

O Jeann, en ho yaouankiz, pebez tristidigez
A zantit var hoc'h ene, pa zonjit'n hor bro gez !
Beuzet eo ho taoulagad ; fraillet eo ho kalon,
O velet hor bro garet dindan treid ar Zaozon.

O Jeann, sec'hit ho taelou. Sellit varzu an Ee ;
Ac'hano e teui sikour ; dont a rai heb dale.
Bro Franz a vo dilivret gant eur plac'hik dister....
C'houi eo. Stagit d'al labour. Arabad koll amzer.

O Jeann, deut eo evidoc'h an amzer da guitaat
Ar re a garit kement : breudeur, ha mamm ha tad.
Daoust d'ho rann galoun, sentit ouz ho « Moueziou » santel ;
Ar Franz, en he angoni, a c'houlen ho skoazel.

O Jeann, nag a vurzudou a ra dreizoc'h Doue !
Ho par, da ren eur brezel, ne oue gulet morse.
Arme ar Zaozon, bodet en dro da Orlean,
Ouzoc'h ne c'hell ket herzel ; tec'het a rank buhan.

O Jeann, goude Orlean, e trec'hit e lec'h all,
Hag enep deoc'h e klever ar Zaozon o yudal ;
Mes, en despet d'ar gounar a verv en ho c'halon,
Charlez seiz a zo sakret ; startëat eo he drôn.

O Jeann, al labour dispar ho peuz græt beteg-henn
A dlefe tenna bennoz, mil bennoz var ho penn.
Mes siouaz ! petra veler ?... Heb dale oc'h guerzet,
Taolet 'n eur prizoun heuzuz ha d'ar maro barnet.

O Jeann, daoust m'ho peuz ato bevet 'vel eur zantez ;
Kredet zo bet koulz koude kaout abek 'n ho puez.
Gant eur barnar digaloun touellet gant Satan,
Oc'h kondaonet da vervel, da vervel 'kreiz an tan.

O Jeann, setu an tantad a dle ho merzeria.
Strakal a ra ar flammou ha prest int d'ho moug.
Diou vech c'hoaz hano Jezuz a gouez euz ho kinou...
Vel eur goulmik, hoc'h ene a nij prim d'an envou.

O Jeann, euz barr an envou, taolit breman eur zell
Ouz ar vro ho peuz karet, karet betek mervel.
Dre ho skouer hag ho peden, roit nerz ha fizianz
D'an dud leal a labour da zavetei bro Franz.

J. B.

Eil Gantik.

Var don : *Meulomp holl.*

DISKAN :

Gloar, henor, meuleudi }
Da Blac'h euruz Domremy. } bis.

Hor feiz a ra deomp gullet
Jeann d'Ark ar Plac'h euruz
Var eun trôn lugernuz
E palez kaer an Dreinded.

Ne glaskas var an douar
Nemet henor Doue ;
Breman hi 'gav en Ee
Gloar hag henoriou dispar.

O nag a draou burzuduz
He deuz-hi græt guehall
'Vit savetei Bro-C'hall
Kouezet 'n eur stad truezuz !

Breman stad hor bro garet
Zo truëzussoc'h c'hoaz ;
Breman hor bro, siouaz !
Gant tud difeiz zo renet.

Plijet, o guerc'hez karet,
Kaout truez ouz bro Franz.
Ennoc'h he deuz fizianz ;
Ganeoc'h e vezo salvet.

Ouzpenn, var hor bugale
Grit eur zell, ni ho ped ;
Ra vo miret bepred
Distlabez-kaer ho ene.

Bennigit e peb amzer
Tud yaouank Breiz-Izel ;
Ra vint, gant ho skoazel,
Diouallet diouz peb danjer.

O Jeann, o pedit bemdez
'Vit soudarded hor bro ;
Goulennit evitho
Vaillantiz ha guir furnez.

'Kreiz ar brassa trubuillou
Ne fallgalounec'h ket.
'Veldoc'h e vimp bepred
Gouzanvuz en hor poaniou.

En hor ginou, Plac'h santel,
Pa deui heur ar maro,
Lakit an daou hano
Oa livet var ho paniel.

J. B.

Trede Kantik.

Ton : *Guerc'hez sakr* (Toniu Kempfer n° 65).

DISKAN :

O Jeann d'Ark, en deiz-ma ken laouen,
Guir gristenien bro Franz a greiz kaloun ho ped ;
'Vitho plijet ganeoc'h digant Doue goulen }
Ma vint stard en ho feiz bepred. (bis) } bis

Ni ho salud, o guerc'hez dispar
A blijas kement da Zoue ;
Goude ka'z trubuill var an douar
Breman ez oc'h euruz en Ee.

Hanoiou santel JEZUZ, MARI
Oa livet var ho paniel guenn ;
Merkit anezho, ni ho suppli,
En hor c'halonou da viken.

Yaouankik c'hoaz, Moueziou burzuduz
A zeskas deoc'h karet ho pro.
En envou breman, o Plac'h euruz,
Evit bro Franz pedit ato.

Ennoc'h, o Jeann, 'kreiz hon trubuillou,
Hon euz lakat hor fizianz.
Evit Bro-C'hall, dre ho pedennou,
Bezit Guerc'hez an dilivranz.

Pedit, ma teui ar guir liberte
Da bara c'hoaz var hor bro gez ;
Goulennit ma velimp adarre
Ar peoc'h o ren en hon touez.

J. B.

TREDE LODEN

EN HENOR DA ZANT MIKEL

1. Peden da Zant Mikel goude an Oferen.

Sant Mikel Arc'hel, difennit ac'hanomp er brezel ; bezit hor skoazel a enep fallagriez ha finessaou an drouk spered. Ni ho suppli, ra zeui gourc'hemen Doue d'hen lakat da blega ; ha c'houi, mestr braz arme an Elez, stlapit en ifern, dre nerz an Aotrou Doue, Satan hag an drouk sperejou all a zo o redek dre ar bed evit koll an eneou.

Evelse-bezet-great.

2. Kantik.

Var don : *Nous voulons Dieu.*

DISKAN :

*O Sant Mikel beniget,
Ni c'houlen ho skoazel ;
Taolit eur zell var ho bro garet ;
Sikourit an Iliz santel.* } bis.

Pa gredas Lusifer 'n em zével
Enep Doue, e lein an Ee,
Sant Mikel, gant an Elez fidel,
A zifennas guiriu Doue.

Pa oue laret ar c'homzou heuzuz :
« *Non serviam !* Na blegin ket ! »
Kerkent oue klevet : « *Quis ut Deus ?*
Par da Zoue n'eus den ebet ! »

Raktal ive an Eal gallouduz
A strink an diaoulou var ho fenn
Beteg donder an ifern spontuz,
En tan a zevo da viken.

Na kaer eo guelet prins an Ele
Guisket evel eur brezellour !
He zorn nerzuz a zoug eur c'hleze ;
He droad a flastr an enebour !

Hirio, siouaz ! an drouk sperejou
Eo evel toret ho chaden.
O Sant Mikel, deuz lein an envou,
En ho enep deut d'hon difen.

Goulennit evit ar vugale
Ma vint sentuz ha fur bepred ;
Diouallit ar yaouankiz ive
A enep skoueriou fall ar bed.

Beillit ouzpenn, o Arc'hel santel,
Var holl zouarded hon arme,
Ma vint d'ho dever bepred fidel,
Tud direbech e peb doare.

Holl hon euz ezom euz ho sikour,
Rag brezel a zo heb ehan ;
Hon diouallit diouz an enebour,
Dreist holl da heur hon tremenvan.

TAOLEN AR C'HANTIKOU

	Pajen.
Araok kuitât.....	6
Beteg ho trôn en envou	7
Digor eo Miz Mari	3
Diredet omp holl, o Mari.....	3
Gloar, henor, meuleudi	9
Guerc'hez leun a drugarez.....	5
Kanomp, kanomp gant levezet	4
Kenavo d'id, miz Mae.....	5
O Jeann d'Ark.....	9
O Sant Mikel beniget.....	11
Setu deut adarre.....	2
Peden da Zant Mikel goude an Oferen	10

Imprimatur :

Quimper, le 1^{er} Avril 1910.

EM. FLÉITER,
Vic. gén.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.